

Pa oa an oabl hag an douar tost an eil d'egile...

Get Daniel Carré



Un amzer 'zo bet ne oa ket kement a hent 'vel ma 'zo bremañ etre an oabl hag an douar ; kalz tostoc'h e oant an eil doc'h egile; ken tost ma oa trawalc'h d'an dud sevel o brec'h hag astenn o dorn evit touchiñ an oabl. Un dra biskoazh bravoc'h !... Soñjit 'ta ! Da noz e oa moaian flouraat al loar en ur dremen, kuntuilh ur steredenn da lakaat en e vlev pe da spilhenniñ doc'h e zilhad. Hep komz ag aezamantoù arall ! Get an dorn e oa tu poulziñ ar c'houmoul a-gostez d'an heol da splanniñ ; pe derc'hel ar c'houmoul du a-dreist d'ar vro pa oa afer a c'hlav d'an hañv pe a erc'h d'ar gouiañv. Ya, ma zud vat, kement-se a oa dispar... Perak eh eus bremañ kement a hent etre an douar hag an oabl ? eme-c'hwi. Hama, selaouit hag e klavahet.

Un deiz, pell, pell-bras 'zo e arrivas amañ e Breizh-Izel, ur vag karget a varc'hadourezh a bep seurt : danvez d'ober dilhad kaer, dantell, brageris. Setu ne oa ket bet pell ar Vretoned da dostaat a-vostad. Ken niverus ma voe bet gwerzhed, riñset pep tra e berr amzer. Petra 'faot deoc'h ? Da varc'hadourezh a-feson e kaver sav aes a-walc'h. Ha, pa arrivas ar pratikoù diwezhañ ne gavazont mui netra da breniñ ; fallgountant e oant, m'el lâr deoc'h. Setu e oa bet furchet ha difurchet dre ar vag da welet ma ne vehe ket kavet un disterig tra bennak d'o c'houtantiñ.

A-benn ar fin, dre forzh klask ha diglask, e voe bet dizoloet, e kambr ar c'hapiten, ur sac'hadig greun ; greun gwenn-kann, munut munut.

— Kement-mañ, eme ar c'hapiten, n'eo ket da werzhiñ. Dober am eus evit en em vagiñ. Greun mel, d'ober youd. N'anavit ket ?... Matoc'h eget kaout mel ne gaver ket. Kalz gwelloc'h eget krampouezh pe galet, kredit-me. Ma n'em c'hredit ket, dalit ! Hadit ha c'hwi a welo.

Hag e tennas ag e sac'hadig-eñ un dornadig greun da reiñ d'an dud.

'Vel-se eo, ma zud vat, e arruas ar mel e Breizh-Izel.

Ha graet e oa bet 'vel ma en doa lâret ar marc'hadour. Met pa oa bet eostet ar mel ha kaset ar c'hentañ pochad d'ar velin e oa bet souezh : ne oa ket tu maliñ an ed-se evel an edajoù arall : re vihan e oa ar greun evit bout flastret mat etre daou vaen ar velin, plusk a chome, dibosupl dispartiiñ mat ar bleud doc'h ar brenn. Ret e oa breviñ ar mel, er pilat d'en drailhiñ munut.

Penaos ? El lakaat en ur mortar krouizet en un tous koad pe en ur maen, hag er pilat, en drailhiñ, er flastriñ get ur pilon ; ur vazh koad ponnner, tev ar penn anezhi. Ha skoiñ : « Dao ! », ha « Dao ! », ha « Dao ! »... Evel ma vez graet atav e meur a gornad dre ar bed.

Pilat mel a oa labour ar merc'hed. Ur sapre labour, hir ha poanius, rak ponner e veze ar bizhier pilat : seul ponneroc'h ar pilon, seul uheloc'h e veze savet a-dreist ar mortar, seul welloc'h, seul efedusoc'h e oa.

Er-maez, dindan an oabl, e veze pilet : re izel e vehe bet e-barzh an tier, ne vehe ket bet lec'h a-walc'h da sevel ar pilon, aes eo kompren. Ha « Dao ! », ha « Dao ! », ha « Dao ! »

Ne oant ket bet tamm pell é tapout an taol, m'el lâr deoc'h. Plijadur a savas mem etreze ! Ken e sailhe ar pilonou a-raok kouzhel er mortarou « Dong ! Didong ! Dong ! Didong ! » Nag a lañs !... Met, en un taol e voe klevet sonenn ar pilonou é chañj : « Bounng ! Dao ! Bounng ! Dao ! » Get o lañs e oant daet da vonet ken uhel... ma o doa touchet an oabl !...

— Opala ! eme ar merc'hed. Re izel, re izel oc'h, oabl. Hor steurmiñ a rit aze. Pellait ! Savit uheloc'h ha laoskit-ni da labourat.

Hag an oabl da bellaat a-zoc'h an douar. Hag ar merc'hed da zerc'hel da bilat, hardizh : « Dong ! Digdong ! Dong ! Digdong ! » Ur bam a oa o gwelet ar pilonou é sevel atav uheloc'h a daol da daol. Ya, met emberr e voe klevet arre « Bounng ! Dao ! Bounng ! Dao ! » Stokiñ a raent doc'h an oabl arre...

— Afe ! Afe ! eme ar gwragez troc'het o lañs dezhe. Oabl, pellait 'ta ha lezit lec'h geneomp ! Ale ! Savit ! Uheloc'h, mar plij !

Hag an oabl da sentiñ doc'h ar goulenn, da bellat c'hoazh a-zoc'h an douar. Hag ar merc'hed da bilat pelloc'h. Bremañ pa oant akustumet e vannent o filonou a-dreist o fennoù hag e kouezhiñ àr o holl bouez er mortarioù en ur flastriñ ar greun mel.

Met, emberr, e tazont c'hoazh da stokiñ doc'h an oabl « Bounng ! Dao ! Bounng ! Dao ! » Ar wezh-mañ e fachas ruz ar grwagez :

— Oabl ! eme-int. Trawalc'h ! Arriv omp skuizh geneoc'h ! Pellait ! Pellait da vat ha lezit-ni da labourat !

Neuze, an oabl, imoret fall get an dismegañs diskouezhet dezhañ, en em lakaas da sevel, da sevel, ken uhel ma ne jenas ket mui labour pilat ar merc'hed. Echu pilat e voe darevet ar yod mel kentañ. Na mat e oa, ma zud paour ! Ken e oa savet brezel etre ar vugale evit kaout al lip er gaoter. Hag abaoe an amzer-se eh eus bet dalc'het da c'hounit mel ha d'ober yod ha kaout mel er vro-mañ.

Abaoe an amzer-se ivez en em gav ken pell an oabl hag an douar an eil doc'h egile. Kaer e zo bet pediñ hag adpediñ an oabl da ziskenn davet an douar, da zonet da gemer al lec'h en doa a-gent, emañ chomet bouzar ha mut. Ha priziñ a ray en ober un deiz bennak ? Ha moaian a vo en-dro, pa vo baleet da noz, flourat al loar ha kuntuilh ar stered ?... Un deiz bennak, marse. Piv 'oar ?

